

KENTSKRID

LAVAR a gendalc'h ingal gant e gefridi a zo reiñ un alberz eus labourioù diorren ar brezhoneg. En e 12t niverenn ez eus bodet c'hoazh notennoù en-dro d'an imbourc'hioù renet er mare-mañ war ar jedoniezh hag ar jederezh, war skiantoù an alvez hag ar beved, war ar c'halvezerezhioù, war ziskiblezhioù ar vuhez, ar gevredadelezh, an istor ha war ar brederouriezh. Daou gammed nevez a verker hevlene : an eil o tennañ d'ar brederouriezh, egile d'ar gedvuhez.

E dibenn LAVAR 12 ez eus ur Gerva a brederouriezh. Ned eo ket an hini kentañ savet e brezhoneg. Maodez GLANNDOUR ouzhpenn pemont vloaz 'zo a embanne war *Studi hag Ober* rolloù gerioù eus an diskiblezh evit skoazellañ lennerion e bennadoù. Un dornskrid 300 pajenn a fizias ennon, *Geriaoueg a brederouriezh*, m'en doa adkemeret hanc'herieg VALLEE ha roet astenn dezhi. Maodez GLANNDOUR a yae ken pell ha ma c'halle mont er prantad eus istor ar brezhoneg ma labour e : frouezh oa e deskad termenoù eus ur brassell skolek war brederouriezhoù an tremened. Rebech a reer dezhañ bezañ manet tostoc'h d'ar Skolastik eget da breder e gantved. A zo gwir, met hevelep tuadur n'en devoe ket delanvad bras war an disoc'h, rak pezh a verne neuze oa prientiñ ar yezh da c'hoveliañ he binvioù kefredel ha n'eo ket c'hoazh ren drezi holc'hadoù a live hollvedel. *Preder* a adsammas an embregadenn hag, e-doug pergont vloaz, a vukas da gevala an dek mil ger ret da zeraouiñ perzhiañ en un devezout diles.

En hon c'herz emañ hiziv an dek mil ger — hag un nebeut re all ouzhpenn — an holl anezho resis, arc'hwelek : arnodet int bet e studiennoù war aozerion gempred, a zo muioc'h : e testennoù orinel a brederouriezh ha haeriñ a c'haller n'en deus ar brezhoneg dilañs ebet ken war ar yezhoù all en tachennoù, bevennet c'hoazh, ma 'z eus bet devezet drezañ. Kenderc'hel a ra ar goveliañ danvez yezhel evel en holl yezhoù bev, met evel er yezhoù deuet d'o oad ez eo yevet hiviziken ar goveliañ gant ar c'hrouiñ kefredel. Pelloc'h n'eo ket dre ar yezh hepken ez eo orinel an testennoù, met dre ar mennozhioù. Termenoù hon preder ne dalvezont mui dre zaveiñ da dermennoù allyezh,

met dre eztaoliñ un devezout gwriziennet er brezhoneg. Azon eus an eilpennadur eo e ranker e degouezhioù 'zo nevezc'heriañ o c'hevatalioù allyez.

Ar Gerva prederouriezh er c'hant dek pajenn diwezhañ eus korf LAVAR 12 zo ouzh e ober un alc'houez brezhonek-gallek(-alamanek-saoznec) dezhañ 3 000 enmoned hag un alc'houez gallek-brezhonek gant 4 000 enmoned. Ouzhpenn an termenou a brederouriezh ent strizh ez eus ennañ termenou yezhoniezh, yezhouriezh, jedoniezh hag ivez geriennoù pemdeziek a c'hell ar prederour kaout ezhomm anezho. Da ziwall ez eus evelkent : “Gerva prederouriezh Lavar 12” n'eo ket geriadur ar brederouriezh, pell diouzh eno. Un divrazadur kentañ, skort, anezhañ n'eo ken. Gortoz a ra d'e heul an aradennad gervaoù all a amparo danvez krañ ur geriadur. Arabat e ve enta e arverañ evel ur geriadur ha pa ve unan diverret : talvout a ra hepken e-keñver ar studiennoù a ra pep mellad dave dezho — en e destenn digeriñ e lenner hiroc'h stlenn war an divoud.

Ar c'hammed all, testet gant notennoù 'zo eus LAVAR 12, zo graet war dachenn an damkaniezh. Gwechall pa gomzed a zamkaniezh ez intended damkaniezh an ober dispac'hel, ac'hoel un ober politikel a neuz varksour. Hiziv emañ ledanaet an erdal : kement ober 'zo en deus e zamkaniezh : anv a reer eus damkaniezh an ober yezhel, an ober arzel, an ober trevvael... Amañ ez ambredan damkaniezh ar gedvuhez a-zalc'h ouzh ar yezh. N'eus eno netra nevez : pezh a lenner e LAVAR zo un askemer dedalvezet d'an amveziadoù a vremañ eus ar pezh a skrive Maodez GLANNDOUR e 1972 :

“En deiz-all em eus lennet e galleg ar frazenn-mañ, a zegasan deoc'h evel m'emañ : « Nous avons besoin pour penser d'images et de mots. Quand notre vocabulaire s'appauvrit ce sont des zones entières de notre psychologie qui risquent de sombrer dans la nuit » — « Evit soñjal hon eus ezhomm eus gerioù ha kealioù : pa c'hoarvez d'hon geriadur paouraat, eo lodennoù a-bezh eus hon ene a zo e riskl da gouezhañ en deñvalijenn. »

“Ur bern levrioù relijiel a zo bet skrivet e Breizh er c'hantved diwezhañ ; n'eus hini ebet avat a vefe un oberenn veur, nag un dra dreist ; troidigezhioù ez int. Ar menozioù a chom izel : levrioù skrivet evit tud isdiorreet. Ya, pe e plij deoc'h pe ne blij ket n'eus forzh, ar relijion a zo chomet amañ isdiorreet, evel ar peurrest. Eus ar bern levrioù-se n'eus pajenn ebet a dalvezfe bezañ degaset en un teskad. [...]

“Ar pezh en deus manket da skrivagnerion relijiel an 19vet kantved, n'eo ket anavezout ar yezh komzet, met kaout ur spered krouiñ : krouiñ gerioù, krouiñ pennadoù, krouiñ levrioù. Ha neuze eo tachenoù a-bezh eus hon ene a zo chomet en deñvalijenn.” (*Studi hag Ober*, 16-17, 1972, pp. 68-69.)

Kel zo da reiñ d'ar brezhoneg un dezvad kefridiel. Emañ an traoù en arvar da vont buan. Ar gouarnamant sokialour zo o paouez sinañ *Karta ar yezhoù rannvro*, an dehouad COZAN en deus krouet *Ofis ar brezhoneg*. Unan koulskoude a vank war al leurenn : ar brezhoneg. Rak pe vrezhoneg en devo an dezvad ? An dilerc'hioù teodyezh aet pell 'zo e-maez ar gedvuhez ? Sabir ar mediaoù hag eil derez *Diwan* ? An nevezteodyezh, gwalarneg paourat ha sonnet desket dindan c'hwec'h miz, a leugn kelaouennoù an emsaverion ? Mar rankje ur gevredigezh bevañ e hini pe hini eus ar brezhonegoù-se e vije ur giladenn drastus eus ar spered. Ha diboell a-walc'h e vije an dud e Breizh evit trokañ ouzh ar wir yezh ez eo ar galleg un ases yezh na oufe ober dezho nemet “kouezhañ en deñvalijenn” ?

Marteze e spurmantomp bremañ ar ribl all, diraezet eo zoken war boentoù 'zo. Neoazh e chom ramzel an islonk a ranko ar brezhoneg treuziñ da vezañ ur wir yezh. N'eo ket an islonk eo hon spont, met an dic'houzvez anezhañ eo ar vrezhonegerion. D'un den yaouank mennet da labourat a oa oc'h anzav ar spont-se end-eeun e skrive unan ac'hanomp : “Ned in ket ken pell ha Churchill a bromete « gwad ha daeroù » da Vreizhveuriz e 1940, met ne dremeni ket hebiou d'an dekmiliadoù eurvezhioù trevell a 'z kortoz mar dalc'hez gant da erv.”

Guy ÉTIENNE